

# Da Wazed Plugüen

## marvet evit ar Vro

---

Ar re zo a galon vat marvet evit ar Vro  
O deuz gwir teufe ar bobl da bedi evito !  
Etouez ann hanoiou kaer, o re e'r re gaera ;  
C'houezek ha pevar ugent emaint merket ama !

Spontus ar gont pa zonjer, rag unan dre ugent  
Euz ann holl dud oa o chom e parrez Plugüen  
Zo bet diskaret duze er brezel milliget,  
Yaouank e'hoaz, e kreiz o brud hag e barr o yec'hed !

Epad mizou ha mizou, re'liez gwall gelou  
O deuz laket da redek meur a vor a zaelou,  
A zaelou hag a goueze 'n eur vriza an douar,  
Ken na oa mui e peb leac'h nemet anken, glac'har.

Ar Wazed ter a ouelomp, gouenn Breiz ha gouenn  
soudard,  
Na da Zoue na d'o Bro biskoaz n'int bet trubard.  
Marvet int var an dachen ! O maro zo bet kaer  
Rag kouezet int kalonek 'n eur ober o dever.

'Vit d'ar c'horf beza lazet, ann ene na varv ket :  
Eneou Gwazed Plugüen skournij ana bepred.  
C'hoant hon euz-ni d'o gwelet ? Evit o gwelet mat,  
Digoromp hor c'halonou, sarromp hon daoulagad.

Kenvroiz, ni ho salud ! Salud deoc'h, Mignoned !  
Salud deoc'h, tud a galon ! Salud deoc'h, Barozed !  
Setu erfin goulaouet evidomp an devez  
Da zont da ginnig deoc'h hon holl anaoudegez,

Da baea deoc'h ar dle braz hon euz en ho kenver,  
P'e gwir peuz skuilhet ho kwad vit difen hor Bro ger,  
Da laret deoc'h trugare, trugare ha bennoz,  
Ha da c'houlen deoc'h diskuiz e lein ar Baradoz !

Gant tud, n'ouzon ket piou, ez euz bet lavaret  
Gant ho parrez birviken ne vijec'h henoret ;  
Padal Parrez Plugüen, mamm brokus ha tener,  
D'he bugale kalonek 'n euz savet eun templ kaer !

Savet he deuz eun aoter evit hoc'h henori ;  
Sonn dreist eman ar Groaz hag a ra he dudi.  
Hoc'h hanoiou da viken a vo diwallet mat  
Gant Hor Zalver a skuilhaz 'vidomp ive e wad.

Savet he deuz eur bez koant evit ho Relegou,  
Eur bez koant hag ho meulo adreuz ar c'hantvejou ;  
Deuz spered ho kenvroiz ho sonj na yei biken,  
Ken neubeut hag hoc'h hano divar mein Plugüen !

A rumm da rumm, eb ehan, an dud en em vodo  
En dro d'ho mean-bez aman, evel ma reomp hirio,  
D'ho meuli, ha da gana, gant ar vrasa doujans,  
Pedennou kaon ann Iliz, ken leun a esperans.

Varzu o farrez hirio holl dud koz Plugüen  
Dre brenestr ar Baradoz a daol o zell laouen,  
Evit gwelet henori o bugale vihan  
N'o deuz ket treac'het o gouenn zoken e kreiz an tan.

'N eur gouel kaer evel hirio, n'euz den ebed ama  
Na zantie ket en e greiz e galon o stoka.  
Ar barrez abez ema he c'halon o virvi  
Gant karante 'vit an dud a varvaz eviti.

Breudeur, sec'homp hon daelou ! Kalonou ankeniet,  
Ma sellomp deuz ar Groaz, dioc'htu ni vo skoaziet ;  
Krenvât rai hon esperans da vont en o c'hichen  
Er gwella Bro, en eur vro na vo kollet biken.

Fouge zo ennout, Bro Frans, gant bugale hor Breiz :  
« E peleac'h kavont seurt nerz ? - Peleac'h nemet  
'n o Feiz. »  
Ra vo eta da vennoz ma yal ar Feiz bepred  
Var gresk e Bro Breiz-Izel ha dre holl dre ar bed !

Abaoue meur a gantved al leac'h-ma zo santel ;  
A yreman e tisklerio pegen kriz e'r brezel,  
A laro d'an dud pedi ar Mestr braz d'he fellât  
Laro dezo 'n em garet, kouls ha mont var wellât.

Hed ann hent, o tont d'ar skol, ma merc'hedigou ker,  
C'houi zestumo bokedou eleiz ho tavancher,  
Da ficha bez ar Wazed a dreac'haz Herodes,  
Muntrer ar vugaligou, tad an dristidigez.

Paotred, c'houi dostao ive ; c'houi a stouo ho penn ;  
Tennet ganeoc'h ho tokou, c'houi laro eur beden ;  
C'houi a dempsio ho kalon e kalon ar Wazed  
Zo e lizerennou aour var ar mean-ma hanvet.

Var'histoer nevez ar Frans e lizerennou gwad  
O deuz skrivet o hanô, ha chom e rai dalc'h-mat.  
Keit ha ma ruilho skeduz en oabl glaz heol ha loar,  
Keit-se, Gwazed Plugüen, keit-se pado ho kloar.

Bodet holl er Baradoz, c'houi gano gant dudi,  
En dro da Zantéz Jeann d'Ark, da Zoue meuleudi ;  
Da virviken c'houi gano kantik ar Verzerien,  
Kantik merzerien ar Frans, skeduz-ho kurunen.

Sonit, kleir benniget, taolit laouen d'an traon  
Ho mouez, klemvan hirvouduz, a-uz kear ann anaon,  
Pa welit splann dirazoc'h drapo hor Bro garet  
O strilla gant levenez var bez hor Zoudarded.

*Plugüen, 17 a viz even 1923.*

PER BRELIVET, SKERNEK.